



Intron ouesk (Madame acrobate)

Troidigezh graet gant Sonia Orriger, Guylaine Sergent, Ha Silvenn Koant

Pajenn 1

Sot e oa an Itron Ouesk gant he zi.
Gwelout a rez perak !

Pajenn 2

Er c'hontrol, ne blijje tamm ebet d'an itron Ouesk ti
an aotrou Bihan.

Pa veze o tremen e-biou,
E veze soñjet ganti :

- Un ti ken bihan,

kalz re aes eo da bignat warni !

Pajenn 3

Un tamm uheloc'h e oa ti an aotrou Nec'het evit hini an
aotrou Bihan.

Plijout a rae muioc'h d'an Intron Ouesk

Dreist holl abaoe ma oa bet da gerc'hat en dro un
delienn varv war e doenn !

Hep kemer skeul an aotrou Nec'het,
Evel-just !

Pajenn 4

Abaoe an devezh-se,
n'he doa ket bet tro d'an itron Ouesk krapañ war tiez all.

Digalonekaet bras e oa gant an dra se.

N'he doa ket c'hoant ken ober lammoù risklus e-kerzh he
baleadennoù zoken.
Ne veze nemet rodet ganti.

Pajenn 5

D'ur gwener, e-keit ma oa hi, o rodal,
e oa an aotrou Treut, oc'h adlivañ e di.

An ti strishañ er bed e oa.

Uhel a-walc'h e oa, neketa?

Pajenn 6

Ar gudenn a zo e tremenas an Aotrou Dichañs
d'ar gwener-se dindan skeul
an aotrou Treut.

Pajenn 7

Gwelout a rez an disoc'h !

Pajenn 8

Dre chañs, e klevas an itron Ouesk
huchadennoù an aotrou Treut.

Buan, e krapas war moger an ti.
Digudenn, e tegasas en-dro an aotrou Treut
en e jardin, dindan he brec'h.

Ne oa ket gwall bounner,
Dre chañs !

Pajenn 9

D'ar sadorn vintin,
e oa kelaouet an holl dud deus taol-kaer
an itron Ouesk

Evel ma soñjez mat, e vousec'hoarzhe.

Hag e tijune,

Gant he gizioù dezhi !
Seniñ a reas ar pellgomz avat.

Pajenn 10

Redek a reas da respont.

Unan bennak a lavaras dezhi
E penn all ar pellgomz :

Amañ an aotrou Diseven.

Stanket eo siminal ma mell pezh ti hag uhel pezh ti, gant
un disglavier sot.

Deuit da tennañ anezhañ, hag hast afo,
Ha roit peoc'h !

Pajenn 11

Gant levez,ez,
E reas an itron Ouesk daou lamm risklus

Ijin'ta
Hunvreal a rae krapañ
Ur mell pezh hag uhel ti.

Lammat a reas war an tu d'hen ober,
Ha da c'houde, war moger ti an aotrou Diseven.

Pajenn 12

Ur wech pignet war an doenn
e erruas ar gudenn pa sellas ouzh an traoñ.

An dra diwezhañ d'ober e oa :
Paket e oa an itron Ouesk gant ar mezevelliñ

Opala ! O treiñ e oa pep tra tro-dro dezhi !

Pajenn 13

Tremen a rae dre amañ an aotrou Hillig, avat
Astenn a reas e zivvrec'h hir kenañ

Evit hilligañ an itron Ouesk

Pajenn 14

Evel just

Met just goude bezañ bet adlakaet war al leur...

- Paouezit ! a huchas an itron Ouesk.

Prometiñ, touiñ a ran ne bignin ket mui war tiez ken uhel,
uhel !

Ha setu an aotrou Hillig o vont kuit da gerc'hat unan bennak
all da hilligañ.

Pajenn 15

Diouzh an noz e oa azezet fur an itron Ouesk
en he c'hador-vrec'h.

Met seniñ a reas ar pellgomz,

Dislivañ a reas an itron Ouesk

Piv eo ? a c'houlennas gant ur vouezh leun
a grenadennoù

Pajenn 16

An aotrou Bihan, a lavaras an aotrou bihan

Gant levez, e reas an itron Ouesk tri lamm risklus a-dreñv

Erruout a ran ! a huchas.

Sot on gant an tiez bihan !